

# ERLEC'HIADENN KELENNER.EZ BREZHONEG D'AN DUD DEUET HA D'AR VUGALE



Krouet eo bet kevread SKED evit kas war-raok ar brezhoneg ha sevenadur Breizh e bro v/Brest. Graet eo SKED evit bodañ, unaniñ ha liammañ an nerzhioù (kevredigezhioù pe hiniennoù) a-benn lakaat ar brezhoneg ha sevenadur Breizh da vevañ ha da ziorren.

An den karget deus ar c'hentelioù a vo dindan atebegzh burev ar gevredigezh ha kenlabourat a raio gant ar skipailh melestradurel ha gant tud eus an diavaez ivez (skipailhoù pedagogel er magourioù hag er skolioù, kevredigezhioù, gopridi, tud a-youl vat, izili, skipailhoù buhezourien...).

## KEFRIDIOÙ

Karget e vo an den da gelenn brezhoneg d'an dud deueta ha d'ar vugale er magourioù hag er skolioù gant ur programm resis da vezañ heuliet. Ar pal a zo reiñ un tañva d'ar brezhoneg.

### KENTELIOÙ NOZ

- ✓ Kelenn brezhoneg da dud deueta : kentelioù sizhuniak ha stajoù, war meur a live hag ober war-dro abadennoù e brezhoneg (sadornevezhioù) ;
- ✓ Kemer perzh en emvodoù pedagogel (sevel danvez labour gant ar skipailh) ;
- ✓ Kemer perzh er stummadurioù kinniget d'ar c'hopridi.

### TAÑVA D'AR BREZHONEG

- ✓ Aozañ an tañva d'ar brezhoneg er skolioù en ur heuliañ program an Deskadurezh Stad ;
- ✓ Kinnig ar yezh ha sevenadur Breizh d'ar vugale gant atalieroù a bep seurt ;
- ✓ Krouiñ bilañs an abadennoù evit ar bloavezh ha kemer perzh e bilañs an Deskadurezh Stad ;
- ✓ Kemer perzh e emvodoù pedagogel gant ar skipailh.

### BARREGEZHIOÙ HA DOARE DEN

- ✓ Kaout un anaoudegezh kreñv eus ar yezh (dre skrid ha dre gomz) ;
- ✓ Kaout pasianted, madelezh gant an dud, bezañ youlek
- ✓ Bezañ en e vleud gant ar vugale hag ar re vihan tout ;
- ✓ Gouzout labourat gant ur skipailh ha gant ur strollad bugale ;
- ✓ Gouzout azasaat d'an deskard-ezed (ha d'o liveoù).

### DOARE POST

- ✓ Lec'hioù : Loperhet ha tro-dro
- ✓ Ezhomm : **DIOUZTHU**
- ✓ Embann : 04/09/24
- ✓ Kevrat : CDD darn-amzer Aotre bleinañ hag oto ret.
- ✓ Darn amzer : 50% - 70%
- ✓ Kendiviz ECLAT (kendiviz a-stroll broadel ar Buheziñ) Strollad B Kelenn, feuriad 260